

KIS-353 – Et. **radio-, -graph-**, h.a.

(GE – 25 07 88)

Er *Vocabulaire Français-Breton de Le Gonidec – Nouvelle édition mise à jour et considérablement augmentée par Fr. Vallée*, Saint-Brieuc, 1919, emañ ar mellad :

photo- luc'h- ; (*une*) *photographie* luc'hskeudenn, *f.* ; *art de la* —, luc'hskeudennerez, *m.* ; *photomètre*, luc'hventerez, *f.* ; *photosphère*, luc'hgelc'h, *m.*, néol. (pp. 399-400.)

(Un evezhiadenn diwar vont : termenoù evel ar re-mañ, frouezh prantad kentañ ar yezhouriezh arnevez, a verke da vat distro ar brezhoneg da hentenn ar gerluniañ hervez ar patrom doareer-doareed bet dilezet abaoe ur milved pe dost ha, dre se, d'ar galloud da dalañ ouzh ar yezhoù all ha d'an etrevroadeg. Danvez ur studienn zo gant istor an distro-se.¹)

Anat e tibabas Vallée ar gedrann *luc'h* kentoc'h eget *goulou* pe *sklerijenn* dre benn ma'z eo unsilabennek ha ma oa diarver. Da gevatal da Et. *radio-* e kinnigas *bann-* (1919) ha *skin-* (1931). Dindan levezon Roparz Hemon e trec'has *skin-* hag e voe debarzhet *bann-* da rannoù all eus ar Fizik (*bannhent*, *bannouriezh*) ha d'ar Ventoniezh (*banndresadenn*).

Un nebeut deveradoù all diwar *skeudenn* a zeuas e goulou, evel *skinskeudenn* end-eeun (NDBF., 1970) ; diegi e vez ouzh o arverañ en askont eus o distagadur amjestr (Sem –). E-pad pell e'm skridoù mezegel e tremenis gant termenoù etrevroadel hepken : *radiografiezh*, *tomografiezh*, *arteriografiezh*, h.a. Hogen ar re-mañ a ziskouez bezañ diaes ivez da arverañ. Setu perak ez eus daou amkan d'an notenn-mañ :

¹ Ar Gonideg, atizet moarvat gant Kervarker ha dindan levezon ar gerioù kembraek a amprestent, a voe lusker distro ar brezhoneg d'ar gerluniañ doareer-doareed. Deurus e ve renabliñ dre heuliañ ar geriadurioù an termenoù savet hervez ar patrom-se : a) rakvezant er yezh, sk. *dourgi* (C. 1464) ; b) amprestet digant ar c'hembraeg, sk. *brogar* (GON.FB. p. 585, 1847) ; c) lunist diwar skouer ur yezh all, sk. *dornskrid* (*Roll-girioù ar Jabadao*, [Taldir, moarvat da heul Vallée], 1903) ; d) lunist e preder gant an ergeñverenn, sk. *touellwel* (VALL. p. 470, 1931).

petore stumm dibab evit an termenou etrevroadel en dachenn-mañ ? petore gerluniadoù brezhonek kinnig en o c'heñver ?

Diaesterioù stummadel zo gant gerioù etrevroadel NDBF., anezho un treuzvarc'had etre an diskripañ etrevroadel (Dev) hag ar gerluniñ brezhonek (Glb) : *radiografiezh, radiografiadur*. A-benn ar fin, ar Glb *skinskeudenn*, mar goulenn oueskted teod, ned eo ket ken pout palastr ha *radiografiadur* ; biken ned afen da zistilhañ : "Degasit din ho radiografiadurioù" ! Dav eo merkañ en deus Roparz Hemon savet e dermenou etrevroadel diwar ar c'heriaoueg gallek :

Kalvezerezh :	Gl. <i>radiographie</i>	Br. <i>radiografiezh</i>
Tennañ ar skeudenn :	<i>radiographier</i>	<i>radiografiñ</i>
Skeudenn :	<i>radiographie</i>	<i>radiografiadur</i> .

Mar dibaber avat loc'hañ diwar ar saozneg, e tegouezher gant :

Sz. <i>radiography</i>	Br. <i>radiografiezh</i>
<i>to radiograph</i>	<i>radiografiñ</i>
<i>radiograph, radiogram</i>	<i>radiograf(enn), radiogramm</i> .

Evit a sell ar gerluniadoù Br., e kinnigan erlec'hiañ *lun* ouzh ar valleeg *skeudenn*, ha deverañ diwar *luniñ*, o tigeriñ ur forc'had enta etre an daou stumm *luniñ* ha *luniañ* (*lluno* ha *llunio* a gaver ivez e Kb., daoust ma ne hañval ket e ve korvoet ar forc'had etrezo). Ken e tegouezher gant ar steudad :

Kalvezerezh :	Br. <i>skinluniñ, skinlunerezh g.</i>
Tennañ ar skeudenn :	<i>skinluniñ</i>
Skeudenn :	<i>skinlun g. -ioù</i>
Kalvezer :	<i>skinluner g. -ion.</i>

Daou rumm termenou all a gaver deveret diwar Et. *-graph-* : hervez ar rangorf imbourc'het, hervez ar rizh kalvezerezh arveret.

Hervez ar rann gorf imbourc'het e reer gant Et. *angiografiñ, arteriografiñ, artrografiñ*, h.a., diouzh ma skinluner a-getep ar gwazhied, an talmerennoù, an arzoù, h.a. Kurzhadoù eo an termenou-se diwar *arterioradiografiñ*, h.a. Da c'houzout eo ha savet e vo ar gerluniadoù Br. o terc'hel ar c'hedrannoù en o hed pe ouzh o meztroc'hañ ivez : *gwazhiedskinluniñ, talmerennskinluniñ, arzskinluniñ* (furmoù distabil a dorrfe buan e : *skinluniñ gwazhied*, h.a.) pe : *gwazhiedluniñ, talmerennluniñ, arzluniñ*. Un eil abeg zo evit degemer ar furmoù meztroc'hat eo e c'hoarvez peurliesañ un

divellsteriekaat gant an termenou-se : an *artrografiñ* ned eo ket ur *skinluniñ* arz eeun, hogen ur *skinluniñ* renet war un *arz* a zo bet ensinklet ennañ ul liñvenn pe un aezhenn dargemm.

Hervez ar rizh kalvezerezh arveret, e tiforc'her araezadòu skinluniñ diseurt :

— Dre an *tomografiñ* e skinluner n'eo ket a-vloc'h, met hervez talennoù kenstur, hag e tegouezher gant ur rumm skeudennoù o tiskouez pep a skejenn don pe donoc'h eus ar c'horf. Evit ar c'halvezder-mañ e kinnigan ar gerlunia~d Br. *haenluniñ*.

— Gant ar *skanografiñ* e vez ivez haenlunet ur rann gorf, hogen hervez un tun kempleshoc'h : bez' e vez ar skin X oc'h ergerzhout an ec'honenn da imbours'hiñ o vezañ luget mui pe vui hervez ar gwiadòu treuzet hag e vez enodet gwerzh e readoù disoc'hel en un urzhiataer o daskor e rezh skeudennoù. Evit ar c'halvezder-mañ e kinnigan ar Br. *erluniñ* (oc'h ouzhpennañ un termen d'ar steudad *ergerzhout*, *ernijal*, h.a.).

— Da *skintigrafiñ* ez ensinkler dre ar wazhienn un enfraouenn danvez skinoberiek hag e vuzulier ar skinad ec'hodet diwar al lec'hioù er c'horf ma'z a da lenañ. Savet eo an termen *skintigrafiñ* diwar an Et. *skintillañ* (diwar La. *scintilla* "fulenn", *scintillo* "lugerniñ, strinkellikat"), doare leterc'hadek da aroueziñ ar pikoù luc'h dec'hanet gant ar rannigoù ionaus war dafaroù 'zo anvet dre se *skintillus*. Da luniañ an termenou Br. e korvofen ul leterc'had all, an hini a gaver er Br. *stergann*, hag e rafen gant *skingannañ*, *skingannus*, *skingannluniñ*.

Gant termenou all ar steudad ne sav kudenn nevez ebet :

Dev	<i>mikroradiografiñ</i> <i>radiobiologiezh</i> <i>radiokinematografiñ</i>	Glb	<i>korrskinluniñ</i> <i>skinvevoniezh</i> <i>skinfiñvluniñ</i> (pa vez skinlunet ar fiñv war-eeun)
	<i>radiodiagnostik</i> <i>radioliz</i>		<i>skinfiñvskeudenniñ</i> (pa vez filmet ar skramm skinsell)
	<i>radiopatologiezh</i> <i>radiofografiñ</i> <i>radioskopin</i> <i>radioterapiezh</i>		<i>skindeznaouiñ</i> <i>skinloezañ</i> <i>skinanaezouriezh</i> <i>skinluc'hskeudenniñ</i> <i>skinselliñ</i> <i>skingurañ</i> .

Ar gudenn nemeti oa gant ar c'hevatal gerluniat Br. d'ar Gl. *radiologie*, Sz. *radiology*, pa dalvezont : a) rann a'r Fizik o studiañ ar skinoù X b) rann a'r Vezekniezh o plediñ gant arver ar skinoù X (hag ar skinadoù ionaus) evit an deznouiñ hag ar yac'haat. Keit ma arverer Et. *radio-*, Br. *skin-* e kenstrollad e c'hoarvez un divellsteriekaat a strisha o ster da "skinoù X (+ skinadoù ionaus, e troioù 'zo)". Arabat diwelout avat e c'hoarvez un divellsteriekaat all gant Et. *radio-*, Br. *skin-* e-barzh termenoù evel *skingomz*, *skinwel* ma vez neuze strishaet o ster da "gwagennoù hertzel". Notomp en deus an Al. hepcoret ar skoilh dre zeverañ diwar anv dizoloer ar skinoù X ha savet *Röntgenkunde*, *Röntgenologie*. Dimp-ni d'embrederiañ : mar greomp gant *skinoniezh*, *skinouriezh* evel kevatal da Et. *radiologiezh*, e tioueromp an termen evit "studi ar skinoù dre vras, luc'h, X, hertzel, h.a."